

AN DIAOUL-LAIK.



Ton : An aour ieoten. (Barzaz-Breiz.)

Setu an diaoul o tont er vro,
An diaoul-laïk eo he hano. —han, han!

Er c'hæriou ha var ar mæziou,
C'hui a gavo eur c'hrak-otrou. —han, han!

Henvel mad eo ouz eul lakez
Tolet er meas euz ar palez. —han, han!

Eun tam baro var he lapenn
Evel ki Iann-al-luduenn. —han, han!

Krial, harzal a ra bep tu:
« Me eo mab ar Republik ru. » —han, han!

Dibot en iliz hen guelfet,
En tavarniou na laran ket. —han, han!

Daoulagat diáoul zo en he benn,
C'hoant ober skol en deuz a grenn. —han, han!

Ha de heul e teu eur plac'hik,
Marteze zoken eur c'hregik. —han, han!

Kempennet mad ha guisket plin,
Tronsset he bleo var an tu gin. —han, han!

He c'horf ken reud hag eur penn-baz,
O troïdella eul lost kaz. —han, han!

Hounez a zesko d'ar merc'het
Beza ker fall hag ar botret. —han, han!

Eun ti-braz kaër a vo savet,
Ha Kær-Satan a vo hanvet.—han, han!

Tennet a vo eur c'harrad aour,
Euz ialc'h ar pinvik hag ar paour.—han, han!

Hag a vo laret memez-tra:
« An ti braz-ze na goust netra. »—han, han!

Eno vo skol ha skol bemde,
Skol an dizurz, skol dizoue.—han, han!

Skol hep peden, na dever mad
E kenver ar vam nag an tad.—han, han!

Skol hep lezen ar c'hatekiz,
Skol enep lezen an iliz.—han, han!

Skol ar pennou skanv ha diroll,
Skol a zesko zur mont da goll.—han, han!

Skoliou laïk, na falla tra
Hag ouspenn c'hoaz euz ar c'hera.—han, han!

Tadou, mamou mar am c'hredet
Ouz ar skoliou-ze diouallet.—han, han!

Kredet mad ar skoliou laïk
A laz ene ar bugelik.—han, han!

Laret d'in-me, o bugale,
Petra eo ar skoliou neve?—han, han!

« Skoliou laïk, skoliou laïk,
« Skoliou Ifern ar Republik. »—han, han!

J. Scaffec.

